

Laouig : Ar bleiz hag an daou ejenn.

Daou ejenn a oa o peuri 'barz eul lanneg,
Pa zegouezas eno eur pikol bleiz kezeg¹,
A deuas 'trezeg deze 'n eur yudal gand an naon ;
Med an daou ejenn-mañ, 'vid-se, n'-deus ket aon ;
'N em lakaad a reont prim kostez-ouzh-koste',
'Vid bezañ prest da zegemer komper Gwillaou.

War veg lemm o herniou,
Hemañ a damm da damm a dosta dioute,
A dro hag a zistro, lamp a-zehou, a-gle'
Med kaoud 'ra bepred an eil pe egile.

Prest d'hen kas 'trezeg ar bed all
Hep chomel pell da zidortal.

Erfin, mezeg, divi, hanter lahet,
E rank moned en-dro pe bezañ dizahet² ;
Ha kleved a ra 'neze o tond war e zeulou
En eur loskad blejadennou.

Daou pe dri deiz goude e teuas adarre
Da êsaad o zapoud ha siwaz ! 'benn neuze
'Oa savet kasoni etre an daou ejenn ;
N'hallent mui 'n em houzañv, n'houlent mui 'n em zouten
Hag evel-se 'halals doned dioute a-benn
En eur dagañ aneze 'n eil goude egile.

Bretoned, ma breudeur, diwallit n'errufe
Ar memez tra ganeoh en amzer da zoned.
Chomit oll unanet, 'n em unanit bepred
Nan eus 'med dre eno e hallfet hadsevel
Ar brezoneg hag ho pro garet Breiz-Izel.

¹ bleiz kezeg : ? Marteze eur bleiz ken kreñv hag eur marh ?

² dizahet : toullgovet.